

671

# Gwerz Ernest Renan

A LANDREGER

—><—  
GANT

## KAN BROADUZ BREIZ



Cliché de *La Bretagne Nouvelle*

Setu Drem kaer an dén karet  
Vo he Skeuden hirie zavet,  
En gwengolo, mil nao c'hant tri,  
Dezan, enor ! gloar ! meuleudi !

—><—  
Prix : 25 Centimes

# WAR RENAN

(*Neuz forç pe seurt ton hir, vel hini : « MA C'HALON A ZO FRAILLET, de Proux »*).

## I.

1

Breiziz, ma c'henvrôiz ker, tud lëal a gwirion,  
Tud kalet a tud a boan, paotret leun a galon !  
Gwir vibien d'ar Seltet koz, ar starta we biskoaz,  
Me o ped, breudeur karet, d'am jilaou eur wech c'hoaz ?

2

Ganet a maget n'ho toez, Breizat korff ag ine,  
Ne glaskan met ho laket war hent ar Wirione ;  
Test deuz ho c'holl labouriou, ho poan ag oc'h anken,  
Me garche 'greiz ma c'halon rei deoc'h ar sklaerijen ?

3

Mantret o welet ar Gaou trec'h d'ar. Gwir en hor Bro,  
An dallente c'hoaz o ren, ya ! me garche d'am zro,  
O kelen deuz ma gwella evel ma raez Renan,  
A b'hini he komzin d'oc'h gant eonder m'ar gallan.

4

Ernest Renan zo unan ar c'haera sperejou  
A gement so bed krouet dindan bôlz an envou,  
N'euz kredet he n'em zewel dreist kredennou iskiz,  
Vit laret distag he zonzj d'an holl dud a iliz.

5

Dirak eun den ken hûel, ar skrivagnier dispar !  
Da b'hini 'raer enoriou dre holl war an Douar,  
A da b'hini Landreger 'ra gweliou ar c'haera,  
Kalon pep Breizad a gle trital gant lorc'h a joa !

6

Ar wirione zo kazuz d'an n'heb a zo kabluz,  
Ag ar gwestla tud ho deuz henebourien noazuz ;  
Met lëzomp ar warizi da fonta gant ar vez,  
A leuskomp eur ganaouen a laouenedigez !

7

Abaoue keit-all amzer ma m'an Bro Breiz-Izel  
Golôet, stag tud ag all, dindan eur goss vantel,  
Eo digoulzet he rôga 'vit ma welfomp ive  
Ar gwir sklaerijen dispar ! 'ro kaerder d'ar vûe !

8

Ogen, êru hê an de, ar mare biniget !  
Ma welfomp er penn kenta hor Breiz muian-karet !  
Grass da baotret kalonek, gwiziek a disket mad  
O deuz digoret da galz speret a daoulagad ?

9

Em peun ar re deuz poaniet, prezeget ar muian  
Gant skiant, nerz a poelder he m'an Ernest Renan,  
Eur bugel karantezuz, speret lemm a digor,  
Ginidik a Landreger, a drem-dostik d'ar môr.

10

Mab d'eur c'habiten war vôr, 'oa met pemp bloa, siwaz !  
Pa gollaez he dad karet, beuzet gant ar môr braz !  
Ma n'eo den ken met eur c'hoar ag eur vam.ñ en anken ;  
Holl gweslet d'an dienez goude ker braz goalen.

11

Kemëret vel-se bugel, oe skoliet a disket  
Gant beleyen Landreger vit beza beleget ;  
Kasset goude deuz ho feurz tre beteg kaer Bariz  
Da beur-ober he studi da skolaj Sant Sulpiz :

12

Met dre ma sao war an oad he speret aketuz,  
O furchal piz er ped-man, 'oa rentet ankeniuz ?  
Dirak gêoyer drok-wisket, pechou yûd a digar  
He galon reiz a gwirion oe karget a c'hlac'har !

13

Dirak pep skanvadurez 'ra izeldet an den,  
Chomet aboue keit amzer en dallente da ren,  
He sante eun nerz iskiz, eur c'hoantêgez diroll,  
O vouta war-n-han da rei sklaerded a leiz d'an holl !

14

Met penaoz he n'em gemer, distrei diwar he le ?  
N'êo ked dindan ar zaë dû he raeche kement-se ;  
A tro zro kaer n'eo zellet na wele dirak-han  
Met trubuil a paourte ! he hunan er bed-man.

15

Koulskoude 'dalek an deiz we skôet d'an doëtanz  
Oa gwal vec'hiet he speret, samet he gousïanz ;  
Rak penaoz prezek ar gaou ? chom pelloc'h en hent dall ?...  
Biken eun den evel-t-han n'hell ober kement all ?

16

He c'hoar yaouank Henriett we 'tao dezan aël mad,  
He c'huzullou fur meurbed a boez kalz oar he stad,  
Ag eun deiz peur-rezolvat he losk ar zoudanen,  
Ag he tro keïn d'an iliz evit c'heuill he greden.

17

Koulskoude wie ervad ebarz er vicher-ze  
Vije meurbed dizoursi en tro-pad he vûe !  
Lêc'h o kwitad, er c'hontrol, na wele dirak-han  
Met dienez, poan, hirvoud ! war hent ar bed paour man :

18

Pa oe goulennet out'han. perak 'rae kement-se ?  
« C'houlennan ket, he mezan, nac'h ma zonj na ma fe ;  
« Ober gaou deuz ma c'halon, na deuz Krouer ar Bed ;  
« Prezek d'am c'hensertet all ar pezh na gredan ket ! »

## II.

19

Ne glaskin ked displega he vûe penn-da-benn,  
Ken neubeud al Leoriou kaer gret demp gant-han da lenn,  
Em pere eo merket sklaer taolen ar bed gwirion,  
An hent eon 'gleffe da c'heuill kement den a galon.

20

Ne gomzin war he zoare dirak tud Breiz Izel,  
Met evit diskwel deze pegement eo hûel !  
An den stard a kalonek 'c'heuill moez he gousïanz  
Vit embann ar wirione, dispont hep tam drouk-ranz.

21

Na kaera enor ! hini an den zo n'em westlet  
Korff ag ine d'ar skiant 'vit vad he genseurtet !  
A dro keïn d'ar faosente a d'an devalijen,  
Vit chacha poblou abaff er maez deuz ar vouillen l

22

Rak 'tre vo an dud a boan o kass ar pep gwella  
D'ar re flour 'ra goab out hê hep divêroun netra,  
Ar gwir ingal en tresom n'êrêo birviken ?  
A setu perak Renan 'zinac'haez beleyen ?

23

Zavet a disket gante; n'ho zoez keit-all amzer,  
Stumet en tre ho daouarn da boket d'ho micher,  
Oa ken abek war ho feiz, ho lezen hag ho stâl,  
Ma raez abred faë gant-han chom eno da vragal !

24

N'haille ked chom da deuzi em park ar re falla  
A ve dalc'hamad o krôzal war benn ar re wella ;  
Al lern o prezek d'ar yer, ar bleizi d'an denvet,  
A douzont gant a beb seurt ostillou diremet !

25

El léc'h ma sonje dezan ne oa met vertuziou  
Ne wele ken er c'hontrol met a beb seurt techou :  
Zantelez ar veleyen n'êo met eun digare  
Da zerc'hel ar boblou kaez hûalet dindan-hê.

26

Ho stâl na n'êo ken, allaz ! nemet eur c'hoss burzud,  
Stignet en gis d'eur wiet war goure an holl dud ;  
Ho feiz met eur gojigel, livet brao, kaer meurbet !  
O stourm deuz ar skianchou koulz a deuz kerz-ar-bed.

27

Ne wele met faossente, dindan pechou treitour,  
Golôet gant ar furnez ag eur bern kojou flour,  
Falz kredennou kemesket kontrol an eil d'he ben,  
N'ho deuz bet gret a viskoaz met touelli an den.

28

Kaer a n'eo klask ar gwir feiz ne gave deuz out-hi  
Nemet ar skeuden hepken ; tûd leun a vastari,  
Holl o prezek, o c'hourdouz, o sponta an dud kaez !  
A zalc'hont dindan ho zreïd er brassa dienez !

29

Gwelet a rae sklaër dreist-holl ar goassa brezellou  
Vije ar re 'darze puill dibenn koss kredennou  
A penaoz ar feiz direiz n'oa mad met da vaga  
Dizurz, bec'h a kassoni en toez an dud sioula.



30

Dirak eun eveleb stad diremet a diroll,  
Stignet barz em pep amzer d'eur rûm dre ar bed holl,  
He comprenaez sklaer buhan ma oamp er baourente  
Ne oa netra all kiriek nemet an dallente.

31

He galon wir a tener, douget vit mad an holl,  
Poaniet o welet ar bet keit all barz en argoll,  
A gredaez kemer ar gark da zizalla ar bed,  
En eur glask ar wirione en amzer dremenet :

32

Ebarz er skrituriou koz, d'an heb a daol plaed-mad  
Eo e kever ar roujou deuz pep feiz a pep stad :  
Rust a distûm da genta, tamm a tamm a weler  
O chench giz ag o kreski, pentet gant an amzer (!)

33

Dirag gigou ken diboell a boez war an holl dud  
Eun den a ijin ker braz n'hellie kamet chom mud ;  
Red a oa d'he gouzianz ober unan a zaou :  
Laret sklaer ar Wirione, pe dewel war ar Gaou.

34

Birvi 'rae kement he greiz dirak ar gwir frankiz !  
Ma oa red d'he speret kaer furchal, klask, sellet piz,  
Vit hellout embann gant nerz ar c'hredennou neve  
A c'hae da dreï ar boblou war hent ar gwir vûe.

### III.

35

Ar pez evit ar muian 'skôe war he speret  
Oa bûe gaer burzuduz Jezuz a Nazaret,  
Lazet en kreiz tre daou laer gant beleyen he vro,  
A veve krak 'stum d'ar re 'gemer peurz n'he hano.

36

Kemennet dont d'ar Jude 'beurz Ministr ar Skoliou,  
Vit stûdia war al léc'h penn-dalc'h hom c'hredennou,  
He furchaez ken aketuz en Istor Mab an Den,  
Ma tisplegaez he vûe n'eun doare sklaer a plen :

37

Ned a bep kaketêrez, hep na brûd na burzud.  
He komz d'emp deus an Hini 'garaez kement an dud,  
N'eo laret sklaer 'benn beva êvruz war ar bed-ma  
Vo red d'an holl n'em garout a dont de n'em harpa.

38

Evel-t-han ive, Jezuz, ebarz en he amzer,  
N'eo laret ar wirione gant kement a eonder,  
Skôet gant he skourj pouner war an drubardërien  
A veo brao n'eur ober goab deus al Labourërien.

39

Ya ! Jezuz oa evel-t-han ar Mab heneb ar Fall  
Ar Speret gwir o prezek an hent eon d'ar re all,  
A lare krenv hep ehan, dre léc'h ma tremene,  
Eo red karout an Nesa benn plijout da Zoue.

40

Jezuz, eur paour, 'oa drëist holl heneb al lorc'hachou ;  
Heneb ar falz beleyen, gwerzërien pedennou ;  
Heneb arvêou direiz, feiz sôd, skeudennou ven :  
He Lezen holl 'oa merked dôn en kalon peb den.

41

Ar rouantelez dispar ! a b'hini he komze  
Zo aman war an douar er peoc'h, er garante,  
Pa virfomp he c'hourc'hemen dre hor mad-oberou,  
A nann o chom moredet da zrailla pateriou.

42

Allaz ! eul Lezen ken sklaer, rôet d'emp gant Jezuz  
Zo flastret a dispennet gant eur bern tud noazuz,  
Deuz steuet war he goure falz-kredennou iskiz !  
Vit harz an hini wirion da zont ken war he c'hiz.

43

Ogen evit kement-se eo he raez ar Breizad  
Bûe Jezuz a neve vit an dud eon a mad,  
Ma reno em pep kalon he gomjou kaer a fur,  
A ma kemëro an holl he furnez da wir stur.

44

Despet d'ar gojigel vrao, pentet d'emp war he stad  
Jezuz n'hê ked eun Doue ; met eun den eon a mad,  
A zo bed merzeriet gant tud fall he amzer,  
Falz-beleyen vel hom re, o veva deuz geöyer.

45

Miromp he lezen, breudeur, meulomp holl anezan !  
A rentomp gwir drugare d'ar Breizad braz Renan,  
Ar c'henta speret hûel n'euz kredet displega  
He vûe gant gwirione, penn da-benn vel ma oa.

IV.

46

Lëzomp kement a labez da Jezuz he hano,  
Da grôzal heneb Renan gant ho bojigenno ;  
Daoust d'an holl dekrîadek, deuz ho zëod bulumuz,  
Renan 'oa en ho c'hever bepred madelezuz :

47

Em pep lëc'h he prezege ar mad, al lëaldet ;  
Gwir doujanz d'al Lezennou evel ma z'ëo gleët ;  
Gonzanvi kreden ped den, frankiz d'al lavariou ;  
Setu an aliou fur 'oe war he vuzellou.

48

Lëc'h hom beleyen biken ! kenvrôiz, klêvit mad ?  
Na c'honzanvont tan-foelt tra pa na ve ked d'ho grad ;  
D'ho c'holl burzudou fentuz (!) ëo red kredi war c'hed,  
Ag hint ar muian kabluz gante dirak ar bed :

49

Sonjit en amzer euzuz pa oaint deuz hom gouarn,  
El lac'hadegou spontuz ! dre dan a dre ouarn !  
An dud a vern distrujet ! pa vijent ked a dû ;  
Goassa amzer oe biskoaz oa dan ar venëc'h-rû !!

50

Sonjit he fell d'hê bepred hom skleja 'vel gwech-all ;  
C'hoeza en hano Jezuz, brezel, bôsen, tan gwall !  
Rak hint na gleskont kamet met maga kassoni ;  
Laket an dud vit *ar feiz* (!) vel chass de n'em dëbri !

51

Mamen an holl dizurzou, ar spont ag ar glac'har !  
A zo em pep feiz direiz hadet war an douar ;  
An dud kaez he n'em drailla balamour d'ho doue !  
Goude biskoaz rûm a n'hê n'euz goezet petra c'hê ?



52

Ar goassa tud a viskoas, sellit mad en dro d'c'h  
Eo ar re fell d'hê gouarn 'n'he hano em pep l'c'h :  
N'eur laret demp n'eun garout an eil ag egile,  
He karfent gwelet maro 'n'heb na gred evel-t-hê !

53

Daou zen a ziou feiz kontrol zo tre vel ki a kêz ;  
Beleyen pep-hini n'hê zo kalz diotoc'h c'hoaz,  
Dalc'h-mad em bec'h a bep tû 'm'haïnt deuz he n'em daga  
O klask goud p'hini neze n'euz an doue zota !

54

Sellit deuz hom beleyen, ar gounar en ho c'heiz,  
Prest da deuleur dir a tân em p'ëvar c'horn a Vreiz,  
Ar malloz en ho genou ! war skeuden-zen Renan (?)  
Vo da viken 'despet d'hê, enor braz ar vro-man !

55

Pa m'an 'n 'holl skrivagn'erien, sklabezet dre ar bed,  
Ar sperejou hûella, ar c'haera tud disket,  
O kana meulodiou d'ar gallouduz Renan !  
Hom zammou koss beleyen a strink bulum war-n-han ! ?

56

Savet a vo eur c'halvar deuz ho feurz en Treger  
Vit henebi, stourm bepred ? en dudigou dister !  
Goude goud ma tistakfe ho c'Hrist, beo, deuz ho c'hroaz  
He skôfe war-n-hê dare, goassoc'h evit biskoaz !

57

Lezomp an dud penn-follet (!) da dremen oc'h imor ;  
Zaludomp he skeuden-zen ; enoromp he vemor ;  
Kanomp stard he vertuziou ; meulomp he vadelez ;  
Ra vo he speret ganemp da virviken jamez !

V.

58

Meulomp ive, mignonet, rüm re c'Hlaz Breiz-Izel,  
Ho c'hazëten *Breiz-Neve* (1) « Araok ! » bete mervel !  
Ho deuz savet he skeuden war dachen Landreger ;  
A ro demp nerz a skoazel da gerzet gant poelder.

(1) *La Bretagne Nouvelle*, 40, rue Trézel, Paris.

67

Hen zo hunan ar postou deuz al Lezen-Neve,  
Vo eun deiz hini an holl, (Ar bobl humanite,)  
Pa vo trec'h ar skianchou, deud an *Unvaniezh* ;  
Ar gwir lældet o ren ; brassoniou er maez !

68

An holl dud vo vel breudeur dindan ar memeuz fe :  
Frankiz, labour, diskamant, peoc'h paduz, karante.  
Ar boblou en êvrustet a gasso da bourmen  
Ar bern falz-doueou ven, kiriek d'hom flaneden.

## VI.

### (PARENTHÈSE

69

(Neuz bed den war an douar, na birviken na vo ?  
Da gomprenn barz en *dra* gaer a grouæez kement so ;  
N'heb a ro eur stûm dezan vit trei he genseurtet,  
Eo c'hoaz ar muian kabluz dirak-han war ar bed.

70

N'heb a gemer peurz hennan, n'eur laret petra c'hê  
A bella out-han beb taol ebarz en dallente ;  
Rag he vignonet brassa, p'ëo hen ar gwir speret,  
Eo hep doan ar sperejou muian sklaerijennet ?

71

Ober a raez mad pep tra ; rôet n'euz da beb den  
Eur gousianz er barno er bed-man pe n'he ben ?  
Eur speret da welet sklaer ; Skiant dont war gaerâd :  
Met biskoaz den n'euz karget da brezek war he stad ?

72

Gwelit, an holl dud a boell, a fe-vad, vel Renan.  
Eo an dud muian gwirion, an tosta-kâr dezan ;  
'Ra em pep læc'h ho dever, heb klask penta he stad :  
Grid evel-t-hê, bezid fur ? tud leun a galon vad.

73

War hom zam boul bri, kredit, benn ma c'haï mad an traou,  
An tosta d'ar wirione 'renk trec'hi war ar gaou ;  
Da viken vo bec'h a chao tre ma vemp en hent dall ;  
Pa vemp holl sklaerijennet vo gret gwelloc'h ingal !

74

Ogen, eun deiz êrûo, vel ma m'euz dec'h laret,  
Veffomp holl er baradoz, breudeur el lëaldet !  
Pa m'hom holl akizitet speret ar wirione,  
A zo ar vammen out-han er skïanchou neve.)

FERMÉE)

75

En deiz-se Ernest Renan, vo unan ar c'henta,  
Gant Fourier, Proudhon, Voltair, Hugo, Komt a Zola,  
Deuz an dud muian karet, brudet, meulet meurbed !  
A rûm da rûm da c'houde, tre vo tud war ar bed.

76

Pebeuz lorc'h. pebeuz enor ! da vugale Arvor !  
Gwelet unan deuz ho re barz em penn an istor,  
War gwir Leor kaer peur-baduz doare tud an douar !  
Vo dreiz-se war-n-han eun deiz en êvrustet dispar !

77

Sevomp eta hor moejou hirie, braz a bihan,  
Da gana meulodiou d'ar Breizad braz Renan !  
Unan a bostou ar bed war hent kaer ar Furnez !  
Kalon eon, speret gwirion, den leun a vadelez !

78

Dougomp dezan trugare, mil mennad, mil bennoz !  
A kanomp holl he vraster ag en deiz ag en noz ;  
Kemëromp hen da bëron an eil ag egile,  
Vit ma reno entresomp ar peoc'h, ar garante !

79

Gant eur gwir anoudëguez sevomp hor sperejou  
Da gana enor dezan ! a nerz hor c'halonou ?  
Diskwellomp sklaer d'ar bed holl, a skô war-n homp he zell,  
Penaoz ëo difün bepred paotret stard Breiz Izel !

80

Kanomp-ta gwitibuñan, kanomp stard diboez-penn !  
Enor da Ernest Renan er bed da virviken !!  
Ya ! kanomp skiltruz a yë ! ebarz em pep amzer,  
« Gloar ! Enor a meulodi ! da Renan Landreger !! »

CH. ROLLAND.

# KAN BROADUZ BREIZ

(Ton neve deud deuz Breiz-Veur)

## RANN KENTA

1.

Breiziz, braz a bihan, kanomp gloar d'hom gwen ?  
Kaera tud a daol troad dindan ar wabren !!  
Kanomp holl en enor da Vreiz a da Franz  
A bevomp gant peoc'h a doujanz.

{Diskan :

Er Bed tro-zro,  
Pep rûm-dud a gar he Vro ;  
Ag en tre ma yêlo an Douar en dro  
Ker braz karantez a bado !

2.

Ni dreist-holl, gwir Breiziz, krenv vel an dêro,  
Kalet vel hom reyer, a gar stard hom Bro ;  
Mene, zaon, tachen c'hlaz, léc'h hom diwanet,  
A léc'h m'an hom zud koz kousket.

Diskan .

O Breiz, hor bro !  
Brava taol-douar a zo :  
Tre ma krôzo ar môr dirak-koud tro-zro,  
A rûm da rûm ni da garo !

3.

Ni 'zo eur bobl gwirion, laouen deuz hom stad !  
A m'eump eur yez dispar, gijou dereâd,  
Gwiskamanchou ken brao, tentusa doare,  
Oufe rei kaerder d'ar vûe !

Diskan :

O Breiz, hor Bro !  
Da viken ni da garo !  
Tre ma vo lazou braz, pardonioù tro-zro,  
Merc'het koant a bleun er parko !

4.

Ni gar n'em didûi, barz em pep tachen,  
Chacha stard war ar maout, redek ar zeyen ;  
Rei da vâd tro d'an danz, c'hoeza tantatajou,  
Kana gwerjou koz a sonioù !

Diskan :

O Breiz, hor Bro !  
Da viken ni da garo !  
Tre ma vo eur biniou da zon eun danz-tro  
Kalon pep Breizad a drito !

5.

En kreiz hom labourioù ni ve bepred yê ;  
Prejou braz, nozvechou, tû pe dû bemde ;  
Ma vemp holl 'skeud hom foan êvrûz deiz a noz  
Gant hom yez ag hom gijou koz !

Diskan :

O Breiz, hor Bro !  
Léc'h ve plijadur bep tro !  
Tre ma vo jabadao, kaniri tro-zro !  
Ni 'garo Breiz-Izel, hor Bro !!



[EIL RANN

6.

Met daoust demp da garout kement hor bro Breiz  
Ni gar hor Bro gaer Franz ken stard all n'hor c'hreiz  
A deuz hom zavetaed dre al Liberte !  
Hom zennet dindan gazel-yê ?

*Diskan :*

Franz, hor gwir Vro !  
Da viken ni da garo !  
Ag a greiz hor c'halon beteg ar maro !  
Ni c'harmo stard, Franz hor gwir Vro !

7.

Deuz holl broyou ar Bed, Franz eo ar c'henta,  
Penn-skwer a stur deze ebars em pep tra ;  
Henni m'an war êlûm an tantet dispar  
A dom poblou kaez an Douar !

*Diskan :*

Franz, hor gwir Vro !  
Da viken ni da garo !  
Tre ma roi diskamant, sklaerijen tro-zro,  
Frankiz, furnez d'ar sperejo !

8.

Têrubl er brezellou, paotret an Arvor,  
D'euz skoaziet ho Bro Franz gant nerz ag enor !  
Ag hirie 'barz er peoc'h gant ar Republik,  
Breiziz vo ar c'henta prestik !

*Diskan :*

Franz, hor gwir Vro !  
Da viken ni da garo !  
Tre ma vo deuz da beurz lëaldet tro-zro,  
Unvaniez en tre pep Bro !

9.

Eun deiz hor bugale dre ar skianchou  
Vo gant-Franz,êvuruz hed an amzeriou :  
Eur wech vo trec'h ar gwir ni vo kaeroc'h c'hoaz !  
Da virviken, Breiziz vo braz !

*Diskan :*

Franz, hor gwir Vro !  
Da viken ni da garo !  
Tre ma c'hi war araok ! war gaerâd bep tro :  
Ar Baradoz er Bed tro-zro !!

10.

O Doue ! kendelc'hid da skwill ho pennoz ?  
Grid ma reno dre holl ar peoc'h deiz a noz :  
Vit ar Gwir ag ar Mad, ni zo prest da zével,  
Vit Breiz a Franz prest da vervel !

*Diskan :*

Ya ! hom diou Vro !  
Da viken ni ho karo !  
Ag a greiz hor c'halon, bepred ni 'gano !  
Gloar a meuleudi !! d'hom diou Vro !!!

CH. ROLLAND.

On trouve toujours chez l'auteur à Guerlesquin (Finistère)

FRANCO :

- 1° *Kaniri-Neve Bro Breiz* (une douzaine de chansons) ; . . . . . 0 fr. 40
- 2° *Ar Vezventi* (drame anti-alcoolique breton-français) . . . . . 1 fr.
- 3° *Sur les Congrégations* (breton-français) . . . . . 0 fr. 40
- 4° *A Cornic Duchéne* (breton-français). . . . . 0 fr. 20
- 5° *Le Président Faure en Bretagne* . . . . . 0 fr. 20
- 6° Feuilles volantes à 10 centimes :

- Plac'h Breiz a Paotr Breiz* ;
- Araok !* (aux Bleus de Bretagne) ;
- La Guerlesquinaise* (Satyre, breton-français) ;
- Répons au linguiste E. nault* (concours Quimperlé) ;
- An Tour mēo !* (politique) ;
- Satut à Krüger ! — Sa'ut au Tsar* (en France) ;
- Les Trois Temps et la jeune Mariée*, etc.

~~~~~  
SOUS PRESSE :

*Double réponse en rimes françaises à « La Résistance »* (Croix de Morlaix)  
30 centimes.

~~~~~  
PARAITRA SOUS PEU :

Recueil complet de pièces inédites (grand volume breton) . . . . . 3 fr. 50

